

# SON AR VOURLEDENNED



423

1

Ganet e Ploneve,  
E kreiz bro ar Porze,  
Me ' gane 'n eur zont er bed  
Son ar Vourledenned.

## DISKAN

Ma ouefen me kana  
Kouls hag ouzon lenva,  
Me ' ganfe war bouez ma fenn :  
Ma mamm ' oa 'r Vourledenn.

2

War he zron an Dukez  
' Lare ar wirionez :  
Koant on me, koantoc'h ' vefen  
O tougen bourledenn.

3

Deuet da Lokornan  
Da bedi Sant Ronan,  
E oa ganti war he fenn  
Eur pez mell bourledenn.

4

Abaoue an Dukez,  
Ken meulet en hon touez,  
Ar vourledenn ' zo chomet  
War bennou-ar merc'hed.

5

Renkit an daledenn,  
Ar c'hoef bihan ouspenn ;  
Diou spilhenn d'al lasou gwenn,  
Peiet ar vourledenn.

6

Lasou gwenn o sevel  
Gant eur bannig avel,  
Pintet uhel war ar penn,  
Me 'gar ar vourledenn.

7

Pe vez bras pe vihan,  
Diouz vez priz al lian,  
Gant bourledenn war he fenn  
Koant e vez ar blac'henn.

8

Gwelit d'an eureujou,  
Redit d'ar Pardoniu,  
N' weloc'h ket merc'hed fichet  
Par d'ar Vourledenned.

9

Da Bardon ar Palud  
' Lare 'n Eskob d'an dud :  
Sellit pebez prinsezed  
Eo ar Vourledenned.

10

Kalz koefou 'zo e Breiz,  
Kizou a zo eleiz ;  
Me ne blijo d'in eur penn  
Ma ne zoug bourledenn.

11

Peus ket koef ar Porze ?  
It diwar ma hent-me :  
Ma dorn-me ne vo biken  
Nemet d'eur Vourledenn.

12

Krampouez a vez aozet,  
Krampouez a vez drebet ;  
Gwella re am eus kavet,  
Re ar Vourledenned.

13

Mat ar chistr e Kerne,  
Foenant pe Gemperle,  
Gwelloc'h 'vez d'am gourlan-  
[chenn  
Hini ar Vourledenn.

10 - 9 - 47

14

Lod ' ya pell eus o bro,  
Ha kerse 'vez ganto ;  
Me 'fell d'in chom er Porze  
Ken n' vo fin d'am buhe.

15

Evelse ma lagad  
' C'hello gwelet dalc'hmat  
Tachennou glas ma farrez,  
Mor beo Douarnenez.

16

Traou 'zo hag a dremen,  
En dro na zeuont ken ;  
Met en Nenv 'vo da viken  
Koefou gwenn bourledenn.

17

Evelse 'vo kanet  
E palez an Drinded,  
Pelloc'h eget fin ar bed,  
Son ar Vourledenned.

J. T.